

## ***Koupabl on :***

### ***I. Deskriviñ emdro ar vedisinerezh ha displegiñ an efedoù àr ar poblañsoù.***

- En XXvet kantved e ya àr raok an enklask er vedisinerezh.
- E 1895 e voe ijinet ar skinoù X get ar fizikour alaman Wilhem Conrad RONTGEN.
- E-penn kentañ e oa evit skeudenniñ an eskern, àr-lerc’h e oa BET evit kleñvedoù ar skevent èl an tuberkuloz.
- Hiziv-an deiz eo BET kaset àr-raok an teknik get ar radiografiezh( evit ur babig e-pad ar brazeded) pe an IRM.
- Pouezus-tre an ijinadenn evit reperiñ kudennoù an empenn pe an diarbenn evit krign-bev ar vronn get ar mammografiezh.
- Araokadennoù ar vedisinerezh o deus gellet brasaat ar spi da veviñ pell a 30 blez.

### ***II. Ur c’hantved get nevezadennoù ar skiantoù hag an teknologiezh***

- En XXvet kantved buanadur an dizoloadennoù skiantel a gas àr-raok ur ouiziegezh hag an teknologiezh e leun a dachenn (medisinerezh, dezougen, titouriñ-kemenn...).
- Mont a ra àr-raok ar buanadur-mañ da vare ar brezelioù hag àr-lerc’h ijinadenn an transistor e 1948.
- Ar buandadur-mañ a zigor mare an elektrinik ha teknologiezhioù an titouriñ hag e ya buan àr an nevezadenn.
- Amzer skigniñ an nevezadenn a ya buanoc’h hiziv-an-deiz èl e vez gwelet get ar skouerioù-mañ:
  - Pellgomz ijinet e 1879 , skignet e 35blez
  - Pellgomzer-hezoug ijinet e 1983 , skignet e 13 blez.
  - Urzhiataer ijinet e 1975, skignet e 16 blez.
  - Genrouedad ijinet e 1989, skignet e 7 blez.

\* Kas a ra an nevezadennoù-mañ kemmoù bras er c’hevredigezhioù hag e lakaa da greskiñ ar live-beviñ.

## ***Deiziad pouezus:***

1895: ar skinoù X dizoloet

## ***Tud pouezus:***



**Wilhem Conrad  
Rontgen  
Fizikour alaman  
Dizoloet ar skinoù X  
E 1895**

## ***Geriaoueg pouezus:***

Ijinadenn: tra, benveg, ardivink nevez-ijinet.

Nevezadenn: lakaat e-pleustr en doare industriel un ijinadenn